

Dipitet eo Jojo, ur paotr bihan c'hwec'h vloaz anezhañ. Laeret eo bet e varc'h-houarn melen digantañ e fin an devezh-skol.

« Ur paotr eo. Aet eo kuit en ur droadikellañ 'pezh ma c'helle », a zispleg Jojo.

Emañ an enseller Frifurch o c'houlennata ar re damallet.

« N'eo ket me an hini eo, gant karr ma mamm e oan distroet d'ar gêr », a zispleg Marie.

« N'eo ket me an hini eo. El levraoueg e oan bet goude ar skol », eme Nikolaz.

« N'eo ket me an hini eo. Plastret eo ma gar abaoe pemp devezh », eme David en ur vousec'hoarzhin.

« Gouzout a ran piv eo an hini g/kablus », a embann an enseller Frifurch.



## Lak ur groaz er c'hombod a zere :

	GWIR	GAOU
1. Melen eo ar marc'h-houarn.		
2. Gant he marc'h-houarn eo distroet Marie d'ar gêr.		
3. Plastret eo gar David.		
4. Gouzout a ra an enseller Frifurch piv eo an hini kablus.		
5. Er sinema eo bet Nikolaz.		

## Kloka gant anv an hini a gomz :

« Plastret eo ma gar abaoe pemp devezh », eme

.....

« El levraoueg e oan bet goude ar skol », eme

.....

« Gouzout a ran piv eo an hini kablus », a embann

.....

« Gant karr ma mamm e oan distroet d'ar gêr », a zispleg

.....

## C'hoari an enseller.

..... eo an hini g/kablus

rak .....

.....

.....

.....

.....

.....

